

An Dogan ☺

Kentañ ma oan aet da dogan, o kama-ra-
 dou ma mignoned ! Kentañ ma oan aet da dogan
 Me 'm boa tamm bara 'bet d'am c'hoan.

Kentañ ma oan aet da dogan,
 O kamaradoù, ma mignoned !
 Kentañ ma oan aet da dogan,
 Me 'm boa tamm bara 'bet d'am c'hoan.

Bremañ me 'm eus ha rouz' ha gwenn,
 O kamaradoù, ma mignoned !
 Bremañ me 'm eus ha rouz ha gwenn
 Hag eun ankane d'am dougen.

Dioueskouarn ru, daoulagad glas
 Hag eur brid arc'hant en e fas.

Ma'm bije ken alies a vuc'h laez
 Hag a dogan 'zo war ar maez,

Ma'm bije ken alies a loen-gorn
 Hag a dogan a zoug ar c'horn,

Me 'm bije graet eur foar en Bre
 'Vije hanvet ar foar newe.

Deus ar ku Vras da Gerampont
 A zo seiz dogan ha tregont.

Ha ma lare 'n eil d'egile 'nê :
 Te a zo dogan, me a zo iwe.

Diou walenn nanter lien moan
 'Zo aet d'ober eur boned d'an dogan.

C'hoaz a lare an dogan kaez :
- Ar c'horn brasañ 'zo chomet erzaez !

Kanet gant Mari Frañseza Kavan, gwreg F. Ballier, ganet e
Tredrez d'ar 4 a viz genver 1882. E Ploubêr 1952. Ar son-mañ
he deus desket anezhañ digant Janed ar Pierres, gwreg Le Blanche,
eus Lokemo, a zo maro pell 'zo. Mari Frañseza Kavan a gane
kement-mañ war ur mentadur 7/4 rik, evel m'am eus notet.

Evit ar c'homzou, sell. ouzh M. Kellien, Chansons et danses,
p. 178, ouzh an Uhel, Soniou, levrenn 2, p. 40.

Evit an ton, sell. ouzh Duhamel, Musiques bretonnes, niv.
360 ha 361.

